

ar fulenn

SKRIVAÑ DA : LUKIAN KERGOAT - RANN AN DIABARZH
15, STRAED AR MANER - 29000 KEMPER -

kelaouenn
diabarzh
SKOL
AN
EMSAV

AR FULENN NIVERENN 88

YAOU 17 A VIZ KERZU 1981.

-PEVARE LODENN AL LEVR BRUDEREZH (gant Tangi LOUARN)


DANVEZ

PREDER...

EVIT

NEDELEG

Setu me
adarre... !
evit an trede
gwech... yen an
amzer, 'gav
ket deoc'h?



krediñ stourm · krediñ trec'hiñ

SKOL AN EMSAV HAG AR STOURM EVIT AR YEZH ABAOE 1969

AN EGIN

Notet hon eus e oa ganet Skol An Emsav diwar enkadennoù daou luskad: hini SADED-ESB diouzh un tu hag hini GALV diouzh un tu all e derou ar bloavezhioù 1970.

Abaoe ar brezel bed diwezhañ e oa en em vodet an emsav sevenadurel en-dro da ziv gevredigezh : "Kuzul Ar Brezhoneg" diouzh un tu o lakaat lod vrasañ e nerzh gant an embann brezhoneg hag ar studioù war ar yezh, o kenderc'hel gant al labour boulc'het gant "Gwalarn" araok ar brezel, gant kelaouennoù evel "Al Liamm", "Hor Yezh", "Preder", "Studi hag Ober", "Barr-Heol", "Skol", ur skol dre lizher "SKol Ober" hag ur skol-hañv "Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien". Ar strolladoù-mañ, o kas o labour en-dro e brezhoneg bep nemeur a zarempredoù gant ar stad hag an aozadurioù ofisiel. O freder a oa lakaet gant diorren ar yezh evit an amzer a-vremañ hag he c'homz er gêr ouzh ar vugale evit ma chomfe, evel-se, yezh ur gevredigezh. Diouzh un tu all, "Emgleo Breiz", o vodañ "Kendalc'h", "Bodadeg ar Sonerien", "War 'leur", "Al Leur Nevez", "Ar Falz", "Bleun-Brug" a glaske, o labourat koulz gant ar skolaerien hag oc'h ober goulennoù ha goulennadegoù ouzh ar galloud, lakaat ar gouarnamant da zegemer ar brezhoneg ha sevenadur ar vretoned er skolioù, er radio hag er vuhez voutin, en aner, peurliesañ, ret eo anzav.

Diwar al luskad kentañ eo e voe savet Strollad An Deskadurezh Eil Derez (SADED) e 1963 a oa e bal sevel un deskadurezh eil derez (eus ar 6^{vet} klas d'ar c'hlas diwezhañ) e brezhoneg penn-da-benn evit an holl danvezioù hag a aozas, evit-se, rummadoù kentelioù dre lizher ha devezhioù-studi betek 1970.

War-dro ar memes mare, e 1964, diwar enkadenn an emsav politikel "Mouvement Pour l'Organisation de la Bretagne" (M.O.B.) ha levezon brezel Aljeria war ar re yaouank e voe krouet ur strollad politikel nevez, a gleiz, diazezet war ar sokialouriezh : Unvaniezh Demokratel Breizh (U.D.B.). Met e-keit-se, a-dreuzh SADED, e oa derou un aozadur politikel brezhoneger o tiwanañ. Al luskad-se o tibab "Emsav Stadel Breizh" da anv hag oc'h emdreiñ war-du ur stadelouriezh strizh a voe distaolet gant ul lod vras eus ar re oa oa bet plijet gantañ da gentañ hag a zeuas da darzhañ ha da zizeriañ (goude bezañ klasket skoulmañ darempredoù gant an UDB d'ur mare).

Lechian GALV

SKOL AN EMSAV : AR BREZHONEG, YEZH UR GEVREDIGEZH POBLEK

Genel a reas ul luskad nevez a nac'he an emdroadur stadelour, koulz ha dibaboù gwall arvarus e-keñver ar yezh alies, hag a lakae ar pouez da gentañ holl war buhez ar gevredigezh ha mennet da ren e brezhoneg ur stourm poblek a-seurt gant hini Galv.

Al luskad-se en em ziazezas dindan an anvioù SKOL AN EMSAV hag EMSAV AR BOBL VREZHON a oa da gemer plas an aozadur kelenn hag ar strollad politikel brezhoneg. Met, hep politikerezh resis ebet, en diavaez d'ar sokialouriezh ha d'ur gevredigezh vrezhoneger emren, en em zivodas Emsav ar Bobl Vrezhon e miz Kerzu 1971.

E gwirionez, ne oa en derou na Skol An Emsav nag Emsav ar Bobl Vrezhon aozadurioù framm et mat. Bodañ a raent en un doare ledan a-walc'h studierien ha skolidi eil derez evit al lod vrasañ, dreist-holl e Bro Dreger, Roazon ha Brest er penn-kentañ, a felle dezho bevañ ha stourm e brezhoneg evit ur gevredigezh vrezhoneger emren.

Oberiantiz pouezusañ Emsav ar Bobl Vrezhon a voe moarvat ar stourm renet evit brudañ Prosez BURGOS e Breizh ha difenn an Euskariz a veze barnet gant renad Franco e Bro-Spagn hag ivez difenn prizonidi Norz-Iwerzhon.

Skol An Emsav, e-barzh niverenn gentañ ar gazetenn he doa savet ("Skol An Emsav" niverenn 1. 4 a viz C'hwevrer 1973) a wele he roll evel-henn

*"-bezañ un aozadur kelenn hag emskiantekaat
-diorren ar gevredigezh vrezhoneg
-bezañ digor war ar stourmoù e Breizh (Sevenadurel-Kevredigezhel)."*

Unan eus palioù SKol An Emsav a oa sevel "ar frammoù he deus ezhomm pep kevredigezh da vevañ", hag anv a zo da sevel ur skol vrezhoneg a-hed an deiz evit ar vugale. Savet e vo ar program evit ar pevare klas. Kendalc'het e vo da sevel kentelioù dre liezher war ar matematik, ar jeographiezh, an istor, al lennegezh. Lod eus al labourioù-se, evel ul levr geologiezh, savet gant Lukian Kergoat a vo embannet gant "Hor Yezh". An enklaskoù war ar matematik a gendalc'h c'hoazh hag ul lodenn zo bet embannet dija gant SKol An Emsav.

Met ar pep brasañ eus al labour a vo gouestlet d'ar brezhoneg boutin ha d'ar c'hentelioù izel evit respont d'ur goulenn brasoc'h-brasañ a-berzh ar re yaouank e Breizh. Ul labour bras-tre eo a zo bet graet neuze. Tra ma oa araoz un nebeut kentelioù brezhoneg amañ hag a-hont e Breizh, e o a zegadoù e veze graet kentelioù hag a gantadoù e tirded ar skolidi bountet gant an ezhomm da adkavout o yezh hag an emskiant deut diwar emdroadur ar gevredigezh e Breizh hag ar stourmadoù sosial (Mae 68, Joint-Français, FLB zoken en derou).

KENTELIOU HA STAJOU DIBAOUEZ

Roll ar stajoù a roio ur soñj eus oberiantiz Skol An Emsav adalek 1969 ; e Plezidi e voe aozet ur stad da gala-goañv, unan all e dibenn 1969 hag un trede e-pad vakañsoù Pask 1970. E-pad an hañv 1970 e voe ur staj pemzektez e Kistreberzh. Adalek 1971 e voe aozet ur staj ouzhpenn e miz Gwengolo hag adalek 1972 eo pevar staj asamblez e pep rannvro a veze aozet da vare Pask. E 1975, diwar skouer ur strollad all "Al Leur Nevez- Brezhoneg Yezh Vev" e voe kroget d'ober war-dro stajoù war ar maez e ti al labourerien-douar (Bro Dreger ha Bro Leon dreist-holl) evit meur a abeg : evit gwellaat brezhoneg an nevez-brezhonegerien eveljust, met ivez evit ma c'hellfent skoulmañ darempredoù gant ar gevredigezh e-lec'h ma chom bev ar yezh ha reiñ c'hoant d'he difenn, diskouez n'eo ket tonket dezhi mont da get.

War-un-dro e veze lieskementet niver ar c'hentelioù-norz e kement lec'h. E-barzh danevell emvod meur an 11 a viz Du 1972 e noter kentelioù e Kemper, Ploveilh, Montroulez, Kastell-Paol, Brest, Plouenan, Lesneven, Gwengamp, Lannuon, Bro Bagan, Sant Malo, Naoned, Paris. Bez es eus peder greizenn e Roazon (Kreiz-kêr, Beaulieu, Zup-sud, Villejean) hag ouzhpenn-se kentelioù-norz e Cesson, Betton, Sant Gregor, Baen Meur, en-dro da Roazon. E 1978 e embann Skol An Emsav ez eo tost da 20 000 eurvezh kentelioù brezhoneg a zo bet savet ganti ha kantadoù a zevezhoù-studi dre holl e Breizh.

UL LABOUR DIGERIN SPERED AR VRETONED WAR O SEVENADUR

Dre ar c'hentelioù, dre an emvodoù stank, ar bruderezh, eo ul labour emskiantekaat a rae ivez Skol An Emsav. Mard eo digor bremañ speredoù ar Vretoned war sevenadur o bro hag ar brezhoneg, e oa pell da vezañ ken gwir araok an emdroadur a zo bet e fin ar bloavezhioù 60 ha deroù ar bloavezhioù 70 hag en deus kendalc'het abaoe.

Kalz eus ar studierien, er skolioù-meur, o tont a ziw ar maez ha brezhonegerien anezho, a oa ganto c'hoazh mezh da ziskouez e ouient brezhoneg gant an aon da dremen evit "plouked". Sed e oa un dra nevez a-grenn gwelet kemend-all anezho o tommañ ouzh o yezh, o teskiñ he lenn hag he skrivañ hag o c'h en em lakaat d'he implij etrezo bep ne vije mui sellet outo a-dreuz pe e-giz tud o ren ur stourm war-gil. Setu penaos en em gavas ur japanad Makoto NOGUTI, deut da Vreizh da zeskiñ galleg, gant ur bagad izili eus SAE, hag en em lakaas da studiañ, da gomz ha da skrivañ brezhoneg. Ken e savas ur pezh-c'hoari brezhoneg "An Houleñn" a voe c'hoariet gant kamaraded dezhañ, evit, emezañ, "reiñ mezh d'ar vrezhonegerien na gomzont ket o yezh".

Stourm SKol An Emsav evit ur gevredigezh brezhoneger a oa neuze aroueziet gant ur skritell savet war an tem "Bretoned omp, greomp gant ar brezhoneg". Ur skritell all anavezet e Breizh a-bezh : "Brezhoneg, langue du peuple, langue d'un peuple", a zo arouezius-tre ivez eus al labour brudañ graet gant Skol An Emsav evit lakaat ar vretoned da adkavout an emskiant pobl ha talvoudegezh o sevenadur poblel : mennozioù degemeret bremañ gant lod vrasañ an dud hag ar strolladoù demokratel e Breizh.

Met, ouzhpenn ober kentelioù, kelaouiñ ha brudañ eo ul labour sevel, krouiñ he deus graet Skol An Emsav war meur a zachenn.

AN EMBANN HAG AR SELLED HA KLEVED

N'eo ket an embann ur roll a-bouez e Skol An Emsav. Kevredigezhioù all a ra an dra-se mat-tre. Met bez he deus bet da labourat war an dachenn-se evit respont da ezhommoù resis ha dreist-holl ledanaat levezon ar brezhoneg : evel-se eo bet embannet an DEIZIATAER hag a zo deut ingal er-maez ha gwellaet abaoe 1974.

Tizhout seurt lennerien nevez hag ober un taol bruderezh a oa ar pal gant al "Luky-lukoù" brezhoneg, pe c'hoazh gant ar c'haier gerioù-kroaz, posterioù gant barzhonegoù Anjela Duval, levrioù evit ar vugale. Tro 'zo bet ivez da embann levrioù kelenn evel hini Mona Kasagnou da reiñ ur benveg ouzhpenn, disheñvel eus ar re all, d'ar re a zesk brezhoneg pe a zesk lenn ha skrivañ.

Evit prederiañ war ster ha talvoudegezh hor stourm eo bet savet hag embannet ivez div niverenn ispisial eus ar gazetenn "Skol AN Emsav". An niverenn 6 : "Petra eo hor sevenadur" gant Fanch Kerraiñ, Yann Erwan Broudig, Fanch Elegoet, Fransez Favereau, Herve Latimier, Makoto Noguti, Youenn Olier, Paotr Skrignag, Yann Talbot. An niverenn 15 : "Kudenn ar Vroad" gant Fanch Kerrain, Ivon Gag, J. Chardonnet, Bernez Rouz, ur pennad eus Mao-Dse-Dong troet gant Laorañs Guillaumie.

Abalamour da bouez ar selled ha klevred he deus ivez boulc'het Skol An Emsav an dachenn-se : e 1975 eo bet kenlabouret da sevel ur film bihan war an douristelezh (Marc'h Du) gant Ti an Holl e Karaez, e 1980 eo bet troet e brezhoneg film CLIN Porsmogor "Gwalc'hit ar bara ha chomit sioul", hag e 1981 ar film danat 16 mm, "Energezhioù Bro Danmark" war an energezhioù nevez. A-hend-all e labourer ivez gant magnetoskopoù hag eo bet lakaet tresadennoù bev e brezhoneg evit ar vugale o kenlabourat gant ar CNCC pe kevredigezhioù all.

KELEIER E BREZHONEG : "BREMAN"

Gant Dael an 21 ha 22 a viz Ebrel 1979 eo bet divizet sevel ur gazetenn vrezhoneg o reiñ keleier eus buhez pobl vreizh, ar bed hag hor stourmaoù. 5000 skouerenn a zo bet tennet eus an niverenn 0 da lañsañ ar gelaouenn e miz Ebrel 1980. "Un ezhomm bras a oa e-touez ar vrezhonegerien a vez kustum da lenn o yezh : kaout ur wir gelaouenn" a lenner war an niverenn-se. "Klask a raimp lakaat warni ar pep pouezusañ eus ar vuhez sevenadurel, sokial ha politikel". War an niverenn 2 e resisa "Bremañ" e soñ : "n'eo ket hor pal dont er-maez bep miz pe bep eil miz, met bep pemzektez, bep sizhun ha bemdez zoken. Gant ma ne vo ket marv ar brezhoneg araok ! Lavarout a reomp : posubl eo, ganeoc'h holl ! Met n'eus ket amzer da goll..."

"Ma n'omp ket gouest e Breizh da gaout da nebeutañ ur gazetenn a geleier e brezhoneg hag a zeuio er maez bemdez e sinifi kement-mañ : ne chom ket bev ar brezhoneg".

Met Olier ar Mogn, rener kentañ "Bremañ" a zisklerio e Dael Mur (23-24 a viz Mae 1981) peseurt stourm pemdeziek ha peseurt nerzh zo aet gant al labour-se. Mard eo un dra ret hag ur chañs evit ar brezhoneg kaout ur seurt gazetenn ez eo ivez un emgann ouzhpenn evit an da-zont hag e rank bezañ skoazellet gant an holl pa ne ve ken o koumanantiñ evit tizhout un deiz, dre ret, ar pal merket: keleier skrivet bemdez e brezhoneg !

GOUEL AR BREZHONEG

Evit harpañ ar pezh a vez savet e brezhoneg, brudañ anezho hag ivez lakaat oberennoù nevez da ziwanañ e-touez an dud eo bet savet Gouel Ar Brezhoneg adalek 1974 gant Skol An Emsav, gant sikour un nebeut strolladoù all, Ar Falz peurliesañ pe kevredigezhioù lec'hel. Ar "Gouel ar Brezhoneg" kentañ a voe e Gwengamp an 1 ha 2 a viz Even 1974. Setu ar soñjoù displeget e-barzh ar gazetenn "Skol An Emsav" e miz Even 1974 (niverenn 10) goude an taol arnod-se : "Pal an daou zevezh-mañ a oa diskouez d'ar vrezhonegerien ar pezh a vez graet en amzer a hiziv e brezhoneg, gant ar brezhoneg, ur gouel sevenadurel rik eta !"

"Gouel ar Brezhoneg" a zeu da heul "emvod meur Pondi (miz Du 1972) ma 'z eo bet lakaet anat gant kantadoù a dud (tri mil a berzhidi pe war-dro) ez eus un nerzh nevez o sevel e Breizh a-du gant ar Brezhoneg ha gwirioù ar Vretoned. Ret e oa mont war-raok gant an hent digoret an deiz-se, diskouez en-digor, a-wel d'an holl, ar strivoù graet gant pep hini war dachenn ar yezh". Er gouel kentañ-se e oa deut meur a vil a dud. Tro a oa bet da welet pezh-c'hoari strollad Skol Veur Brest ("Egile" gant P.J.ELias), Beilhadegoù Treger, Soazig Noblet, Diri Daoulas, Anne Auffret. Deut e oa darn vrasañ ar strolladoù hag embannerien brezhoneg da ziskouez o labour.

Bep bloaz he deus Skol An Emsav kendalc'het da ober war-dro Gouel ar Brezhoneg gant strollad-mañ-strollad e Kastell-Paol (1975), Pont 'n Abad (1976) Kreiz-Breizh (1977), Plabenneg (1980), ar C'hap Sizun (1981) a-benn ar fin gant CLIN Pont-E-Kroaz, Ar Falz, Diwan, MJC Douarnenez. Ur plas bras zo bet atav gant ar c'hoariva (Strollad ar Vro Bagan, C.D.U.B. Brest, Strollad Plougin, Strollad Karaez, Touseg-nij) ha kresket eo bet tamm-ha-tamm hini ar selled ha klevet gant savadennoù diapoziivoù, troidigezhioù, filmoù, tresadennoù bev pe abadennoù FR3. Deut eo "Gouel ar Brezhoneg" da vezañ un tammig lec'h kejañ ar pezh a vez savet e brezhoneg a-hed ar bloavezh.

Met, ma chom a-bouez bras al labour krouiñ diazezet war an darempredoù dre ar yezh, eo anat ivez n'hellfe ket ar stourm-se mont war-raok ma vez nac'het atav doujañ da wirioù sevenadurel pobl Vreizh gant ar galloud kreiz. Hag adal an derou he deus fellet da Skol An Emsav kas war-raok un emgann poblek kreñv war an dachenn-se.

MARE AR STOURMOU FORAN

Un digarez kentañ a voe kavet pa ginnigas Emgleo Breiz da Skol An Emsav ha da Guzul ar Brezhoneg un emgleo evit stourm asamblez. D'ar 26 a viz Du 1972 e voe bodet evit ar wech kentañ e Pondivi un 2000 bennak a dud evit ur vanifestadeg vras evit difenn ar brezhoneg ha sevenadur ar vretoned, gant harp sindikajoù kelennerien ha skolaerien. Un diskleriadur boutin kinniget gant Skol An Emsav, a c'houlenne evit ar vretoned ar gwir d'ober int o-unan war-dro o aferioù sevenadurel, war dro an deskadurezh, hag ivez war-dro o ekonomiezh ha meles-tradurezh o bro.

Ma reas berzh ar vanifestadeg-se eo da gentañ peogwir e tiskouezas e oa gouest ar vretoned da stourm niverus evit o gwirioù sevenadurel. Met ne cheñchas ket kalz tra e politikerezh ar gouarnamant.

Adarre, e 1975, e voe kaset war-raok stourmadoù boutin, gant diskleriadur BREST an 18 a viz gouere 1975 : "bloavezhioù 'zo emañ ar vretoned a bep tu o c'houlenn ouzh gouarnamant bro-c'hall ma vo dalc'het kont eus o gwir da implijout o yezh hag o sevenadur e-barzh an deskadurezh, ar c'helaouiñ, ar vuhez foran, hag o gwir d'ober int o-unan war-dor o aferioù war an tachennoù-se pe da nebeutañ da gemer perzh enno"... sinet gant Kuzul ar Brezhoneg, Emgleo Breiz, Skol An Emsav, Ar Falz, ar Bleun-Brug. D'ar 7 a viz Here e voe un devezh-stourm er skolioù, skignet e voe traktoù ha goulennet ouzh ar gelennerien komz e-pad o c'hentelioù diwar-benn ar brezhoneg, sevenadur hag istor Breizh.

Ha d'ar 26 a viz Here eo ur vanifestadeg vras o vodañ war-dro 3000 a dudu voe savet e Gwengamp gant stourmerien Skol An Emsav evit ul lodenn vras, hag e-lec'h ma kemeras perzh Kuzul ar Brezhoneg, Emgleo Breiz, Ar Falz, Bleun-Brug, Kendalc'h, Al Leur Nevez, Brezhoneg Yezh-Vew, War 'L Leur, Bodadeg ar Sone-rien evit "ur statud evit ar brezhoneg ha sevenadur Breizh en deskadurezh, er c'helaouiñ hag er vuhez foran" hag ur roll goulennoù da vezañ sevenet diouzhtu.

Ha peogwir e chome atav ken bouzar an Aotrou Haby, ministr an deskadurezh, e voe aozet manifestadegoù bihan un tamm dre holl e Breizh dirak an ensellerezhioù akademiezh pe an isprefedioù ar 17 a viz Kerzu, e Brest, Kemper, An Oriant, Gwened, Roazon, Naoned, Gwengamp, Montroulez. Hep disoc'h ebet, avat, nemet, ur wech ouzhpenn, diskouez e kreske atav youl ar vretoned da zifenn o sevenadur.

OF 25/2/75
A LA JOURNEE-DEBAT PAJ. L.A
DE SKOL AN EMSAV :
Les Nantais veulent rester
bretons
en Bretagne

C'est sur les thèmes de la Loire-Atlantique en Bretagne et du rôle de l'écrivain dans la vie et la lutte du peuple que s'est tenue, dimanche comme prévue, la deuxième journée-débat du centre de Nantes de Skol en Emsav, avec la participation de nombreux jeunes Nantais.

Skol an Emsav est une organisation culturelle créée en 1969. Son but est de développer des moyens pour permettre au peuple breton de rester vivant à travers sa culture et en particulier la langue bretonne. Elle compte aujourd'hui un grand nombre de centres à travers toute la Bretagne. Le centre de Nantes, qui compte, cette année 8 professeurs et quelques 150 élèves a été créé en 1972. Des cours sont donnés en différents points de l'agglomération nantaise, le lundi, mardi, mercredi, jeudi et vendredi.

L'ECRIVAIN BRETON MODERNE
CROIT EN L'AVENIR
DU PEUPLE BRETON

Les travaux de la matinée ont été consacrés à la littérature bretonne contemporaine, notamment à travers deux des plus grands écrivains modernes, Youen Drezen et Roparz Hemon. A travers leur vie et leur œuvre, les participants ont tenté d'analyser le rôle de l'écrivain, « dans la vie et la lutte d'un peuple », et plus particulièrement le rôle des écrivains bretons. Si beaucoup des œuvres qui paraissent aujourd'hui en langue bretonne ne

sont pas à proprement parler des œuvres engagées, elles n'en expriment pas moins la vie et l'âme du peuple breton et sont un acte de foi en l'avenir de la langue bretonne.

LA LOIRE-ATLANTIQUE EN
BRETAGNE

L'après-midi a été consacrée à la place de la Loire-Atlantique en Bretagne. Après avoir vu le remarquable montage audio-visuel réalisé par le mouvement B5, « Loire-Inférieure, Atlantique, Bretonne », les participants ont entamé un débat passionné et manifesté unanimement leur opposition au **découpage administratif actuel**, qui fait fi des réalités humaines et économiques et plus encore de la volonté de la population et des élus de Loire-Atlantique. L'actuelle et artificielle région des « Pays de Loire », fruit des rêves de technocrates parisiens, ne peut avoir qu'une existence provisoire ou bien aboutir à un échec retentissant malgré les efforts du gouvernement pour lui donner un semblant d'existence par une propagande insidieuse. Car il est certain que ce n'est pas en manipulant les hommes que la régionalisation du gouvernement actuel en France aboutira à des solutions réelles. L'entité bretonne toute entière, par contre, possède une dynamique propre qui peut lui permettre de tenir une place de choix dans l'Europe de demain.

Skol an Emsav : centre de Nantes, 9, avenue de Tolède.

Ar youl-se a vo kavet ivez evit goulenn ma vefe adstaget Bro Naoned ouzh peurrest Breizh. Skol An Emsav, gant kreizenn an Naoned, a gemeras ur perzh bras evit kas war-raok ar stourm-se gant ar vanifestadeg a voe aozet en Naoned d'ar 25 a viz Ebret 1976 ha dreist-holl evit reiñ dezhi ar ster araokour a anavezomp dezhi hiziv, evit ur Vreizh unvan savet gant al labourerien hag ar bobl ha n'eo ket e dalc'h an notabled.

"KONTAN WAR HON NERZHIU NI HON-UNAN"

Daoust d'ar milieroù a dud o vanifestiñ ha d'an dek milieroù a sinaturioù, daoust d'ar goulenoù graet koulz gant ar c'huzulioù-kêr hag ar c'huzul rannvro (votet d'ar 27 a viz Gwengolo 75), e kendalc'h ar gouarnamant kreizenour gant e bolitikerezh distruj ur bobl. Setu ma ranker kas war-raok doareoù stourm nevez. Hag evel m'eo bet Skol An Emsav nerzh bev ar manifestadegoù e vo ivez ar strollad a gaso pelloc'h an emgann.

KROUIDIGEZH SKOLIOU DIWAN

Evit Skol An Emsav e teu retoc'h-retañ sevel hec'h unan ar skolioù-brezhoneg a zo he fal kaout. E-pad staj-studi Landerne e dibenn ar bloavezh 1975 (goude ar manifestadegoù) gouestlet, evel bep bloaz d'ar mare-se, d'an doareoù-stourm, e vo pleustret war ar gudenn-se hag embannet : "gwelloc'h ar brezhoneg er skolioù-mamm eget er skolioù-meur". Ha war ar gelaouenn diabarzh (ar Fulenn niverenn 5 - 10 a viz Genver 1976) e lenner eo bet kemeret "an disentez start d'ar sevel "Ikastolaoù" da vat. Unan eus an oberoù da sevel eo bremañ".

Meur a abeg a oa e gwirionez da seurt diviz d'ar mare-se. Da gentañ peogwir e oa izili, bugale vihan bremañ ganto, a felle dezho kas anezho en ur skol vrezhonek.

Met un doare e oa ivez, da soñj izili Skol An Emsav, da lakaat muioc'h a dud da gomz brezhoneg er gêr ouzh o bugale dre ma vefe skol d'o skoazel-lañ ivez da zesevel anezho en o yezh.

D'an trede e oa evit ar vretoned un tu da zeskiñ ober o-unan war-dro o deskadurezh ha lezel a-gostez spered an den trevadennet o c'hortoz bepred youl vat ar galloud.

Hag er fin, e oa krouiñ ur "fed politikel", da lavarout eo, lakaat an dud dirak un dibab ; hag ur "fed psikologel" o tiskouez d'an dud e oa posubl mont war-raok hag e oa tud o krediñ atav oa un da-zont gant o yezh.

An diviz-se a vo kadarnaet gant Dael Skol An Emsav d'an 29 ha 30 a viz Mae 1976 ha lakaet neuze da stourm pennañ betek ma teufe da vat.

Adalek miz Gwengolo e oa bet bodet e Kemper ha tro-war-dro tadoù ha mammoù dezho bugale en oad da vont d'ar skol-vamm hag e voe kroget da studiañ ar c'hudennoù da vat : an arc'hant, piv a vije skolaer hag all... Darempredoù a voe skoulmet gant skolioù Bro-Euskadi ; Yann Trelu, e miz Genver 1977 a reas an droiad gant ur savadenn diapo o kinnig an Ikastolaoù, ha Skol An Emsav a gasas daou eus e izili da studiañ tostoc'h ar skolioù-se : "e-pad vakañsoù miz c'hwevrer 1977" eme an danevellerez, Anna Ar Beg, "hoñ eus bet tro, Anna Vari Chapalain ha me, da dremen un nebeut devezhioù plijus o c'haloupat dre Vro-Euskadi. Devezhioù plijus ha kentelius war-un-dro. Pal ar veaj ne oa ket ober touristelezh met gwelout penaos ez ae an traoù du-hont gant an ikastolak".

"Ur skouer da heuliañ. Ar pezh eo deut a-benn an Euskariz da seveniñ a c'hellfomp ivez. Prest eo Euskariz d'hor skoazellañ : dre grouiñ skolioù e Breizh e skoazellomp anezho war-un-dro : krouiñ a raimp un nerzh m'en em c'hronno ar broadoù bihan all tro-dro".

D'ar 15 a viz Genver 1977 e tisplege Herve ar Beg e Paris, e-pad un devezh-studi aozet gant "Brezhoneg-war-raok", en anv Skol An Emsav : "N'eo ket difennet huñvreal, met arabat disoñjal ne vimp efedus nemet ma 'z omp gouest da grouiñ hon-unan. Da-zont pobl Vreizh n'ema nag e Paris, er "Palez Bourbon", na me oar-me pelec'h !..."

"...N'eo nemet ma vimp bet barret d'e seveniñ ha d'e gas da benn e vo dalc'het kont eus hol labour hag hor menzioù. En Euskadi, n'eo ket gant ar P.S. na gant ar SGEN-CFDT, na gant ar SNI eo bet krouet an Ikastolak (5 bugel e 1969 - 300 e 1976...) met gant un nebeut emsaverien euskarat a ouie, e-giz ma lavare Mao gozh, Doue d'e bardono, e vez ret "-kontañ war hon nerzhioù deomp-ni hon unan"- ur skouer evidomp-ni e Skol An Emsav !".

E-pad ur staj aozet gant kreizenn Gemper SKol An Emsav e Gwaien e miz C'hwevrer e teuas ivez tud eus Bro Leon o doa klevet komz eus ar raktresse, hag asambles ganto e voe diskleriet ar gevredigezh a lenner diwar he fenn war "ar Fulenn" a-benn ar fin : " e penn kentañ miz Meurzh eo ganet "DIWAN", ur gevredigezh he fal ober war-dro ar vugale vihan e brezhoneg".

Gant disfi hag enebiezh zoken e voe degemeret ar stourm nevez-se gant an emsav breizhek kozh, met ivez gant an emsav nevez a-gleiz ; araok dont da vezañ kalz buanoc'h eget na vije bet soñjet gant SAE e unan en derou, an obe-riantiz poblekañ evit ar yezh e Breizh.

Evit SKol An Emsav, avat, n'eus morse bet an disterañ tamm douetañs en he stourm keit ha m'en em sell Diwan evel ur servij publik evit skoliatañ ar vugale e brezhoneg ha ma fell dezhi mont e-barzh an deskadurezh ofisiel war an diazez-se. E Breizh eo Diwan a respont ar muiañ da ziazez ar servij pobl ; dre m'en em ziazez e gwirionez war sevenadur pobl hor bro. Amañ e c'hellfemp adlenn ar pezh a skriv Jorj Gwegen e-barzh e levr : "l'analyse de la situation linguistique actuelle ainsi que l'expérience d'autres petits pays (en particulier Israel et l'Islande) nous a montré, à l'évidence, que TOUT COMMENCE PAR L'ECOLE. Souvenons-nous des paroles de Fañch ELegoët : "l'enfant est le pôle vers lequel on ne se tourne qu'en français". Cela est vrai parce que l'école ne reconnaît que le français ; mais que la langue bretonne fasse son entrée décisive dans toutes les écoles, et l'enfant, pôle de la francisation jusqu'à présent, deviendra le pôle de la bretonnisation !".

BREZHONEG ER VUHEZ OFISIEL

Mard eo ar skol un dachenn-stourm diazez, n'ema ket hi troc'het eus peurrest ar vuhez ha ken pouezus all eo adlakaat ar brezhoneg en e blas en hon en-dro : ar pezh a ra Skol An Emsav bemdez oc'h ober e holl labour e brezhoneg, met ivez en diavaez ha pa vefe gant oberoù aroueziel gouest da skeiñ ar sperejoù ha da zigas nerzh d'ar vretoned ha spi en da-zont o sevenadur.

CHEKENNOU BREZHONEG

E 1975, war ginnig un ezel eus Bro Dreger, e voe divizet e vefe skrivet hiviziken ar chekennoù e brezhoneg. Souezhet e veze an dud er penn-kentañ, a-wechoù e oa enebiezh (ral a wech) met peurvuiañ e veze degemeret mat hag un digarez e oa da gomz diwar-benn hor stourm ha da zifenn hor gwirioù. Ne oa ket a-walc'h avat hag a-benn nebeut e vo savet ur c'hampagn da c'houlenn ouzh ar bankoù fardañ karnedoù chekennoù divyezhek. Zoken pa ne veze ket asantet e veze alies respontoù e brezhoneg gant ar bankoù. Hag e 1980 eo ar C.M.B. evit ar wech kentañ a grouas chekennaouegoù brezhoneg. Rankout a reomp goulenn atav kemend-all ouzh ar bankoù all e Breizh ha kenderc'hel da implijout hor yezh evit hor chekennoù ha pa vefe gant ti an tailhanter pe an ti-post. Ur gwir eo !

CHOMLEC'HIOU BREZHONEG

Skrivañ ar chomlec'hioù e brezhoneg war al lizhiri a gasomp zo ivez lakaat anaout hor yezh. Eveljust, n'eus ket da dreiñ anvioù ar straedoù. Victor Hugo a chomo Victor Hugo. Met anv ar gêr a c'hell bezañ lakaet e brezhoneg, koulz ha troet ar gerioù "place", "rue", "avenue" hag all. A-wechoù eo bet nac'het kas al lizhiri pe int bet kollet. Met daoust hag un digarez eo, evel ma ra lod eus ar re zo sañset difenn ar brezhoneg, evit ober pep tra e galleg er-maez eus ar vuhez prevez kentoc'h eget kemer ar riskl da goll ul lizher pe chom hep enkefiañ chekennoù 'zo. Dre he labour pennek war an dachenn-se ivez he deus Skol An Emsav graet ur c'hammed nevez war-raok.

PANOJOU HENT HAG ENSKRIVADURIOU OFISIEL

A vareadoù abaoe un dek bloaz bennak ez eus bet tud o reizhañ an anvioù brezhoneg distreset pe gallekaet war ar panelloù-pennkêr pe panelloù henchañ. E 1973 e oa ar strollad "Brezhoneg Bew" e anv a yae war hentoù Breizh dre an noz, barioù-livañ ha podoù peñtur (liv) du etre daouarn e izili. An Talbenn Sevenadurel Araokour en deus skrivet d'an tiez kêr da c'houlenn outo doujañ d'ar brezhoneg en anvioù hag enskrivadurioù ofisiel. Skol An Emsav, alies da gêver gouelioù ar brezhoneg, he deus savet hec'h unan pe gant strolladoù all panojoù brezhoneg a zo bet lakaet e-kichen ar panojoù gallek : e Kastell-Paol, Kemper, ar Roc'h Derrien, Lokournan Leon, Kastell-Nevez-Ar-Faou hag all... Ar 17 a viz Mae 1975 da gêver "Gouel ar Brezhoneg" e savas Skol An Emsav un emvod gant dileuridi strolladoù all evit goulenn ma vefe lakaet panojoù brezhoneg "Kastell-Paol" war an hent : Per BERNARD evit ar P.S., Loig KERVOAS evit an U.D.B., A.Le GAC evit ar P.C., Jean-Claude ROHEL depute Penn-ar-Bed evit an U.D.F., Per HONORE evit ar Falz, Yann-Ber DUVAL evit "Brezhoneg Yezh Vew", Odile le SCAO evit C.F.D.T. ar skolioù prevez, J.CANN evit ar P.S.U., ha Lukian KERGOAT evit Skol An Emsav a sinas ar goulenn.

Met, daoust da ziskleriadurioù brav an holl dud, n'eus ket bet kalz a cheñchamant. Ha setu perak eo bet divizet gant Skol An Emsav e fin 1981 kas ar stourm aroueziel-se da benn. N'eo ket a-enep da zen ebet, met evit ma cheñchfe e gwirionez hon doare da ober war-dro hon en-dro sevenadurel, evit diskouez e nac'homp an trevadennerzh hag e fell deomp adlakaat hor yezh hag hor sevenadur en hor bro ni hon unan. Ma c'hell seblantout a eil-renk ar stourm-se ez eo koulskoude un doare da "dapout krog en hor gwirioù" ha da gênderc'hel gant ul luskad en deus da bal adreiñ d'ar vretoned ar mestroni war o yezh hag o sevenadur.

TALBENN SEVENADUREL ARAOKOUR BREIZH

Stourm Skol An Emsav a vez renet ivez e framm Talbenn Sevenadurel Araokour Breizh a vod e fin ar bloavezh 1981 : Amis du Parler Gallo, Ar Falz, P.S., P.S.U., R.T.B., SGEN-CFDT, Skol An Emsav, SNETP-CGT, SNI-PEGC 56, SNRT-CGT FR3 ha SFRT-CGT FR3 Breizh-Broioù al Liger, U.D.B., da lavarout eo strolladoù sevenadurel, sindikajoù ha strolladoù politikel a-gleiz. Ganet eo an Talbenn a-c'houde manifestadegoù 1972 ha 1975, diwar un ezhomm da sklaeraat diazezoù ha framm ar stourm.

Skol An Emsav he doa bet darempredoù dija evit-se gant al Leur Nevez, Ar Falz, Evid ar Brezhoneg hag U.D.B. Met Ar Falz eo a roas lañs e fin 1976 d'an Talbenn-se gant ar spi e teufe e-barzh an holl strolladoù politikel a-gleiz. Dont a reas ar P.S., ar P.S.U. hag an U.D.B. ha Skol An Emsav a c'houlennas emezelañ diouzhtu. Rak, sklaer eo bet a-viskoazh evit SAE, n'eus ket tu da zisrannañ ar c'hudennoù sevenadurel diouzh ar c'hudennoù all : ekonomikel, sosial ha politikel, pa 'z eo ar sevenadur, evel ma tiskleir an Talbenn, "un elfenn diazez eus buhez kement kevredigezh a ro nerzh d'ur bobl da grouiñ hec'h unan hec'h amzer da zont".

Abaoe e groudigezh eo bet an Talbenn o kas war-raok ur preder resis war gudennoù sevenadurel ar vretoned, a-drugarez d'ar strolladoù liesseurt a zo e-barzh, diwar-benn an deskadurezh, ar radio Tele, ar vuhez ofisiel. Graet en deus kinnigoù resis evit un deskadurezh poblek divyezhek, evit ur servij pobl radio ha tele liesseurt renet en un doare demokratel gant ar vretoned, evit adstigidigezh bro Naoned ouzh peurrest Breizh. Aozet en deus manifestadegoù e Montroulez (15 a viz Meurzh 1980) hag e Roazon (7 a viz Meurzh 1981) evit ma vefe doujet gant ar gouarnamant d'ar promesaoù en doa graet, implijet ar brezhoneg er velestradurezh.

D'ar 4 a viz Du 1980 e voe aloubet burev rener FR3, an Aotrou Couband e Roazon : "Il apparait que toutes les décisions essentielles sont toujours prises à Paris avec un mépris souverain pour les aspirations légitimes et maintes fois exprimées des bretons" a zisklerias dileuridi an Talbenn dre ma n'hellent morse kaout respont ebet d'ar goulennoù a reont.

Kendalc'het en deus an Talbenn e labour abaoe trec'h an tu kleiz a zo bet e drec'h ivez, ha lakaet en deus e bouez, da gentañ holl, evit ma vefe roet a-benn ar fin an aotreegezh hirgortozet war ar brezhoneg : "Le maintien de cette décision serait considérée par beaucoup comme un véritable affront, un refus de reconnaître la valeur de la langue bretonne, la marque d'un mépris à l'égard des bretons que l'on croyait du domaine d'un passé heureusement révolu" a skrive an Talbenn d'an Aotrou Savary, Ministr an Deskadurezh, pa ne oa ket bet asantet d'al lisañs da gentañ.

Goude ar Falz ez eo Skol An Emsav he deus kemeret karg ar sekretouriezh e dibenn 1981. Chom a ra digor an Talbenn d'an holl strolladoù araokour mennet da stourm evit ur gwir sevenadur poblek.

AR SKRID DIAZEEZ SEVENADUREL

Tra ma kendalc'he ar vretoned da stourm evit o sevenadur e teuas ar soñj da Giscard d'Estaing, prezidant ar Republik, e oa deut poent dezhañ kenkoulz evit an elektourien e Breizh, ha war an dachenn etrevroadel, diskouez ur skeudenn vravoc'h anezhañ e-unan hag eus e renad. Bloaz araok an eleksionoù kêr e kinnigas neuze d'an 8 a viz C'hwevrer 1977 e Ploermel, ur skrid diazez sevenadurel evit Breizh : "Le temps est venu d'affirmer" emezañ, "qu'en particulier il n'y a pas de contradiction entre le fait d'être pleinement français

et celui de continuer à vivre des traditions, des coutumes et une culture régionale ou locale". Pell omp c'hoazh, koulskoude, eus un anaoudegezh klok eus gwirioù sevenadurel Pobl Vreizh. Setu ma tiskleir SKol an Emsav : "Skol An Emsav attend, pour apprécier la valeur réelle des déclarations du Chef de L'Etat français, que la reconnaissance de l'identité culturelle bretonne aboutisse à des mesures concrètes et efficaces permettant au peuple breton d'assumer son droit à la culture et en particulier à la réappropriation de sa langue écrasée depuis des siècles".

Goulenn groñs a reas Skol An Emsav e vefe ar brezhoneg unan eus diazezoù pouezusañ ar skrid-se, e vefe savet ur servij radio ha tele e dalc'h ar vretoneg, e vefe krouet skolioù-mamm hollvrezhoneg (skolioù Diwan) hag e vefe al Liger Atlantel perfriek e-barzh. Ar c'hinnigoù-se, a voe ivez reoù ar strolladoù all, a voe adkemeret gant komision sevenadurel ar C'huzul Ekonomikel ha Sosial, met hini ar C'huzul Rannvro, a oa en he fenn an Doktor BENARD, maer R.P.R. Pont 'N Abad, a lamas kuit skolioù "Diwan" eus an "Operations pilotes".

Ur wech adkempennet e Paris, ne chome mui eus ar skrid diazez, ouzhpenn an digoradur dedennus meurbet, nemet gwellaennouigoù dister evit ar radio hag an tele hag un nebeut gweneien evit ar c'hevredigezhioù sevenadurel, gwall skañv ha dibouez a-grenn e-kekêver ar miliardoù dispignet evit ar galleg, ha dreist-holl e-keñver ezhommoù hor yezh hag hor sevenadur. E-keñver deskadurezh e voe serret ar brezhoneg en ur sistem a vire outañ d'en em ziorren e gwirionez.

Ar C'huzul Sevenadurel a voe savet, daoust ma oa dic'halloud, ha miret outañ kaout arc'hant zoken evit mont en dro e-unan, a servijas da ziskuliañ mankoù ar gouarnamant e-keñver e bromesaoù hag ar pezh en doa sinet. Bevennet e oa e roll, met c'hoariet en deus anezhañ betek penn, ha gounezet en deus ur pouez moral (speredel) gwirion a zo bet un trec'h warnañ e-unan evit an emsav sevenadurel, daoust da spi ar galloud da welout anezhañ oc'h en em zisrannañ hag oc'h en em zrailhañ. Diskouezet en deus ar pouez a c'hellfe kaout en ur politikerezh nevez e gwirionez evit sevenadur pobl Vreizh, ha gant ma teufe e-barzh holl nerzhioù bev ar vro. Skol An Emsav dre e labour er C'huzul hag e burev ar C'huzul e-lec'h ma oa bet anvet e zileuriad, he deus kendalc'het da vurutellat politikerezh ar gouarnamant ha graet kinnigoù evit diorren hor sevenadur.

Degemer ar C'huzul Sevenadurel evel trede kuzul rannvro e Breizh, e framm ar rannvroeladur savet gant ar galloud nevez, ne vefe nemet un dra reizh evit anaout perzhioù ispisial ar vretoneg war an dachenn sevenadurel hag an ezhomm bras da ren ur politikerezh ispisial.

DIAZEOU, DOAREOU LABOURAT HA FRAMMADUR SKOL AN EMSAV

Skol An Emsav n'eo ket hepken ur strollad sevenadurel o stourm evit ar brezhoneg. Bez ez eo ur framm a ro tu da gement hini da vevañ, da labourat da studiañ, da gemer divizoù ha da grouiñ e brezhoneg o vodañ tud a fell dezho ober eus ar brezhoneg ur yezh evit o stourm, pe evit o buhez pemdeziek, ar re oberiant tre evel ar re n'o deus ket kalz amzer pe kalz c'hoant da gemer perzh en oberiantizoù. Soupl-tre e chom aozadur Skol An Emsav, met koulskoude, tamm-ha-tamm, goude bezañ loc'het diwar ur bodad tud yaouank eo deut d'en em arzhiañ ha da gaout ur vuhez demokratel gwirion dre ar brezhoneg. Gant Dael an 23^a viz Mae 1974 eo e vo kroget da vat mare ar c'henurzhiañ ha savet ar skrid-diazez a ziskleir eo ar brezhoneg ur beñveg dieubiñ evit pobl Vreizh hag eo "ar sokialouriezh an doare da reiñ da bep hini an tu da vont mestr war e vuhez ha da bep pobl d'en em ren hec'h-unan".

SOKIALOURIEZH HA GWRIZIENNADUR A GLEIZ

N'eo ket ur stourm yezhelour hini SKol An Emsav eta, zoken ma rank pouezañ muioc'h mui war eeun war ar yezh hec'h unan. Setu penaos en em varn Skol An Emsav e-pad ar 7vet Dael an 29 ha 30 a viz Mae 1976 : "SKol an Emsav en em gav en ul lec'h a-bouez er stourm evit dieubiñ pobl Vreizh hag al labourerien peogwir e c'hell ober al liamm etre ar stourm sevenadurel hag ar stourm politikel rik. N'eo ket stourm SKol An Emsav ur stourm evit kemer ar galloud, met kentoc'h ur stourm evit reiñ buhez en-dro d'ur bobl, rak ar bobl-se eo diazez pep galloud demokratel e Breizh". Ar stourm-se n'eo ket neptu: klotañ a ra gant luskad bras ar stourmoù dieubiñ, hini ar pobloù, hini al labourerien dre vras, gant mennoz ar frankiz, an demokratelezh, gwirioù mab-den da vezañ difennet muioc'h mui e kement lec'h : er vro, el labouradeg, er skol, en doareoù eskemm (radio-tele). Ur stourm a gleiz eo e gwirionez. Dibab ar sokialouriezh zo reiñ an tu d'an holl dud da gemer perzh e buhez ar gevredigezh, da zifenn modoù an holl e-lec'h lezel anezho da vont gant un nebeut tud forzh penaos, sevel ur gevredigezh e-lec'h ma vo ingaloc'h da lavarout eo gwelloc'h, donoc'h an darempredoù etre an dud. Evidomp-ni, bretoned, en em ziorren, n'eo ket o klask tapout sevenadur ar renkad a zo deut da dapout penn ar stad c'hall, met mont war-raok, krouiñ dre hor sevenadur pobl deomp-ni.

FRAMMADUR-KENDEUZHADUR GANT "BREZHONEG YEZH VEW"

Tra ma oa Skol An Emsav oc'h en em urzhiañ e oa bet savet da vare fin ar bloavezh 1974 ur c'hevredad nevez "Brezhoneg Yezh Vew" e anv hag a oa e gwirionez un disrann eus "Al Leur Nevez". Reoù yaouank ar strollad-se e oant. Kavout a raent e oa "al Leur Nevez" troet war an amzer dremenet pa felle dezho ivez ober eus ar brezhoneg o yezh en amzer a-vremañ. "Petra eo Brezhoneg Yezh Vew" a lenner war ur skrid-brudañ : "Mennoz diazez B.Y.V. a zo reiñ lañs dre Vreizh a-bezh (koulz hag e forzh pelec'h ma vez kavet bretoned o vevañ) d'ur gwir sevenadur brezhoneg he yezh, gwriziennet don e istor hag hengoun hor pobl hag o klotañ war-un-dro gant ar vuhez pemdeziek a-vremañ". E gwirionez en em gave ar re yaouank-se tamm pe damm en degouezh ma oa reoù Skol AN Emsav un nebeut bloavezhioù araok goude bezañ kemeret un hént disheñvel. Hag anv a voe buan da gendeuzhiñ. En emvod boutin a voe d'ar 15 a viz Here 1976 e kinnigas Skol An Emsav sevel ar framm boutin o terc'hel an daou anv (BYV-SAE). BYV a oa c'hoazh o klask diazezoù hag an "neptuegezh digor" erbedet gantañ ne glote ket gant ar sokialouriezh dibabet gant Skol An Emsav. Dre an daou-ezeladur e voe diskoulmet ar gudenn peogwir lod vrasañ izili B.Y.V. a yeas ivez e-barzh Skol An Emsav. Hag e 1977 e voe anvet 2 ezel eus B.Y.V. e-touez 5 ezel burev Skol An Emsav.

AR GREIZENN

Diazezet eo buhez Skol An Emsav war ar greizenn a zo emren. Kreizennoù zo, a zo diskleriet hervez lezenn 1901. Reoù all n'int ket. Roll ar greizenn eo, eveljust, reiñ tro d'an izili da vevañ o yezh, met ivez ha dreist holl kemer perzh e buhez ar vro, ar gêr, ar c'harter, o kenlabourat gant ar strolladoù all pe o labourat e-barzh (kevredigezhioù, sindikajoù, strolladoù polititikel) evit lakaat ar vretonek da vezañ mistri war o buhez o-unan, dre grouiñ o sevenadur int o-unan hag en un doare ispisial dre o yezh.

E 1974 e veze lakaet ar pouez war an deskadurezh brezhoneg da dapout, ar pouez-mouez reizh, studi ar rannyezh, ar bruderezh, ar skignañ, ar c'hoariva, festoù, diskouezadegoù ha "kemer perzh e stourmoù pobl Vreizh, sevenadurel ha kevredigezhel dre ar brezhoneg (pa 'z eus tu)".(DAEL 1974).

A-bouez bras eo bet roll Skol An Emsav e meur a-lec'h e Breizh. E Roazon eo bet roet lañs d'an U.P.R.A.C.B. (Union du Pays de Rennes des Associations Culturelles Bretonnes) ha gopret evit ar wech kentañ un den d'ober bruderezh diwar-benn sevenadur Breizh gant skoazell an Ti-Kêr.

E Paris eo bet lañset "Ploubariz" war ar memes skouer. E Kemper ez eus ivez un c'henlabour efedus gant strolladoù all hag e 1980 eo bet savet ur mizvezh sevenadurel breizhek en deus graet berzh. Aozañ a ra ivez ar greizenn week-endoù-studi ha stajoù brezhoneg, kemer a ra perzh da sevel pe da harpañ skolioù Diwan. Met e gwirionez eo tout al labour boutin graet e brezhoneg a-hed an amzer a zo drezañ e-unan an doare nemetañ d'ober eus ar brezhoneg yezh ar gevredigezh e-lec'h ma vevomp.

AR RANNOU

Ouzhpenn ar vuhez war an dachenn e c'hell an izili kemer perzh e labour ar rannoù a zo binvioù ret evit kas ar stourmoù war-raok ha reiñ nerzh d'ar strollad a-bezh.

-Rann ar c'heleenn hag ar stajoù evit ober war-dro ar bedagogiezh, ar stajoù, ar stummadur dibaouez evit bezañ tostoc'h ouzh al labourerien war o lec'h labour.

-Rann an embann hag ar skignañ : levrioù, filmoù, video, deiziataer, poster, ar gazetenn "bremañ".

-Rann an diabarzh : sekretouriezh ha darempredoù etre ar c'hreizennoù, ar rannoù, emzeladurioù, ar gelaouenn diabarzh a-bouez bras evit ar vuhez demokratel.

-Rann an diavaez : darempredoù gant ar strolladoù all, an aozadurioù ofisiel, an FCPB, ar C'huzul Sevenadurel, ar c'hazetennoù, ar broioù all.

-Rann ar mererezh : hep arc'hant na konterezh resis ne vefe moaien d'ober netra.

Pep rann a ra e labour dindan kiriegezh Skol An Emsav en e bezh.

AN DAEL - AR C'HUZUL REN - AR BUREV

Politikerezh hollek Skol An Emsav a vez termenet gant an Dael, bodad an holl izili, en em vod ur wech ar bloaz da nebeutañ.

Evit seveniñ ar politikerezh-se e tibab ur burev 10 ezel a vez fiziet enno pennoù ar rannoù hag unan ouzhpenn evit bezañ rener "bremañ".(Dael 1981).

A-hend-all ez eo ar C'huzul Ren a vlegn politikerezh boutin Skol An Emsav. Bodet e vez bep daou viz da nebeutañ (Dael 1981). Bez ez eus ennañ 5 ezel eus ar burev hag un ezel eus pep kreizenn mui un ezel evit pep kevredigezh ezel eus Skol An Emsav.

DIGOR D'AR C'HEVREDIGEZHIOU ALL

Abaoe Dael 1981, eo bet digoret kuzul ren Skol An Emsav d'ar c'hevredigezhioù all a vefe dedennet gant he stourm. Kement a bouez o deus eta ha forzh peseurt kreizenn eus Skol An Emsav. A-bouez bras eo evit ma c'hellfe ar c'heleier bezañ skignet ar muiañ posubl ha ma c'hellfe un niver bras a dud eskemm o soñjoù ha kas stourmoù asamblez, zoken ma n'int ket dedennet gant al labour pemdeziek na liammet en un doare-strizh.

Setu e c'heller lavarout ez eo Skol An Emsav digor war daou du : o tegemer strolladoù a-ziavaez diouzh un tu hag o kemer perzh e-barzh kevredigezhioù pe kengevredigezhioù all diouzh un tu all.

BEZAN NIVERUS HAG EN EM STUMMAN

Dre an darempredoù-se e labour Skol An Emsav da ziorren buhez sevenadurel ha kevredigezhel pobl Vreizh, da lakaat anezhi da vezañ emskiantek eus he fersonnelezh ha dre-se da adkavout dija ar galloud warni hec'h unan. Ar vretoned ne zeuint a-benn da dizhout ar pal-se nemet m'emaint niverus o kemer o lodenn el labour adsevel, ma ouzont en em vodañ evit bezañ kreñvoc'h ha m'en em stummont war gement tachenn buhez ar gevredigezh a-vremañ : sevenadur, arz, skiantoù, ekonomiezh, kudennoù kevredigezhel ha politikel. Setu aze ar pezh a ginnig Skol An Emsav d'an holl re a fell dezho.



AN DAEL - AR C'HUZUL KEM - AR BUREV

Politikerezh holler Skol An Emsav a vez formet gant an Dael, hag an holl trilli, en em vod ar wech ar dhaer da nebeutañ. Evit seveniñ ar politikerezh-se e tizid ur burev 10 etal a vez listet eno gennet ar rannou hag ouzhpenn evit bezañ "premañ" (Dael 1981). A-bend-all ez eo ar C'Huzul Kem a vefe politikerezh holler Skol An Emsav. Hober e vez hec'h daer vie da nebeutañ (Dael 1981). Hec'h ez eus ennañ 2 etal eus ar burev hag an etal eus hec'h kreizenn hag an etal eus hec'h kevredigezh etal eus Skol An Emsav.